

Ha pa vezo echu hor buez,
 Etre divrec'h ho kroaz santel,
 Leun a fizians en'n ho madelez,
 Jesu, ni a garfe mervel.

J. SALAÜN.

IMPRIMATUR :

Quimper, 9 Novembre 1885.

SERRÉ, vic. gén.

(Tous droits réservés)

Kemper, moulet e ti de Kerangal.

DOUE HOR MESTR

Air : *Nous voulons Dieu.*

1.

Euz an'n envou, mam santez Anna,
 Sellit a druez ouz hor bro,
 Evit hor feiz e maoumb o krena,
 Hor stad a zo kriz ha c'hüero.

DISKAN.

Mari, mam drugarezus,
 Roit sikour d'hon ene !
 En'n hor c'halon ra vevo Jesus,
 Hon Doue, hon Tad ag hor Roue ! } *bis.*

2.

Ho pet truez, Salver benniget,
 Lakit ho kroaz da ren e Breiz,
 Hon diouallit euz an drouk-speret,
 Dalc'hit, kreskit ennomp ar Feiz.

3.

Doue, Doue, ra vezo meulet
 En'n hon touez ha da viken !
 Doue, Doue, ra vezo karet
 Stard ha guirion gant peb kristen !

4.

Ra vo Doue mestr en'n hor skoliou,
 Ma vo desket d'hor bugale
 E aviel ag e lezennou,
 E zoujans ag e garante.

5.

Ra vo Doue mestr en tiegez,
 Doue ag ar Verc'hez Vari,
 Ag he lezen a reno bemdez
 Ar zervicherien, ar vistri.

6.

Pa za paotred yaouank hor Breiz
 Da zervich ar vro en'n arme,
 Gnerc'hez Vari, dalc'hit ho feiz,
 Kreskit en'n ho doujans Doue.

7.

E peb leac'h, o Salver Jesus,
 Bepred, ni a fell deomp gullet
 Savet huel ho kroaz presius,
 Gant-hi holl ni 'zo bet prenet.

8.

Ar groaz sounn var bord hon heuchou,
 Ag a zioc'h penn ar varnerien,
 Ar groaz enoret en'n hor skoliou
 Ag he kalon holl gristenien.

9.

Ni a vézo fidel da Jesus,
 Keit a tevio koumou ar mor
 Da skei, goustadik pe c'hourduzus,
 Var lez kerrez enz hon Arvor.

10.

Var an dachen keit a vo bleunioù,
 Keit a vo bruk var ar menez,
 Bepred e trido hor c'halonou
 O sonjal en'n he vadelez.

11.

Evit rei testeni da Zoue,
 Evit difen he aviel,
 Evit savetei hon ene,
 Ni holl a zo prest da vervel.

12.

Lakit ho lezenn, o va Doue,
 Da ren e pevar c'horn ar bed,
 Ag ho karantez e pep ene,
 En'n ho koad holl int bet goualc'het.